

## Goener ar groas.

(f° 183)

Dar Goener ar groas da kresteiñ  
 Goëlet Jesus wa truezus  
 Kement Kroassant a tremene  
 ar taoliou fouet ken a goulie.  
 Dalek ar pen petek an troad  
 Na wa nemert gouli a goad.

Pa he an teir mary gant an hent  
 tri mab yaouank a renkontrent  
 Ni o salud tri mab yaouank  
 ar Salud zo kaer ag excellent  
 Ker Koulyz dar c'hoz evel dar yaouank.

— Ni zo o distreiñ deus ar menez  
 Goude ober langroas nemes (1)  
 Lakad eur profet da c'hourves  
 Gant goulou tan leterniou kloz  
 ag i mouchet gant an diou poz.

— mar doud te gwir mab da zoue  
 Divin piou n' deus da skoet?  
 — An eb en deus va skoet en deus va skoet  
 Deus va paradoz e c'heo privet.

tri mil hinc a voa c'hoaz  
 ag en ivern losket proaz  
 Ken a voa on Salver biniget  
 o Lamas ol deus a bec'het.  
 o Lamas ol bihen a bras  
 Leveromp ol deo gratias.

(f° 184)

Pater noster principal

---

(1). - Le ms. a : nemes ; faut. il lire : newes?

Gwir a sinceris dan ordinal.  
 eun deiz a zeui eb lakad mar  
 Biskoas na vezo goeled e bar.  
 E frallio ar vein e sec'ho ar goës  
 E serro an noz en kreis an de.

Dar iaou ambluk pa serras nos  
 nen devoa ken Jesus da repos.  
 De vinigou muan karet  
 Da Per en deus bed lavaret  
 Per a ben ma pezo va diansavet  
 Da laret biskoas na poa ma goëlet  
 An dra ze a re eur glac'har em chalon  
 ma dihanzo en eb fezon.

Ar bassion neb e goufe  
 Gant eur bater e lavare  
 eun ine da Zoue a zilifre  
 a biken en peuns an ivern na koeffe  
 na dan erouan nen dafe  
 a da petare eur fin vefe. (1)

Anaïc Cozic g<sup>bre</sup> 1850.

(1). Les deux derniers vers, et le nom de la chanteuse (avec la date) sont écrits dans la marge de gauche de la page, transversalement.